

Sant Ignaz (Saint-Ygeaux) / Saint Ignace (Saint-Ygeaux)

Diskan

1



Diskan :

**Sant Ignaz, eskob ha merzher
C'hwi hon fatron binniget,
Ni 'zeu gant ur galon dener
D'ho pediñ ha d'ho karout.**

Refrain :

*Saint Ignace, évêque et martyr
Vous, notre patron béni,
Nous venons avec un tendre cœur
Vous prier et vous aimer.*

1 - Gwechall dirak ar vourevien
Ha dirak ur maro euzhus
C'hwi a zalc'he start d'ho lezenn
C'hwi 'oa fidel da Jezuz.

*Autrefois devant vos bourreaux
Et devant une mort atroce
Vous avez tenu bon à votre règle
Vous étiez fidèle à Jésus.*

2 - Kaer o devoa ho tourmantiñ
Gant taolioù ha goaperezh
C'hwi 'yae gant ho hent disoursi,
Ho soñj gant ar santelezh.

*On avait beau vous tourmenter
Avec coups et moqueries
Vous alliez votre chemin sans souci,
Songeant à la sainteté.*

3 - Ha pa zeujont gant o loened gouez
D'ho pruzunañ penn-da-benn
C'hwi, ho taoulagad war Zoue
Gant joa 'yae d'o diarbenn.

*Et quand ils vinrent avec leurs bêtes sauvages
Vous broyer tout entier
Vous, les yeux vers Dieu
Alliez avec joie à leur rencontre.*

4 - Lâret a raec'h a vouezh uhel:
 « Ma eskern a vo malet ;
 Mes dre ma relegoù santel
 Ma Salver a vo meulet. »

*Vous disiez à haute voix:
 « Mes os seront brisés
 Mais par mes saintes reliques
 Mon sauveur sera loué. »*

5 - Pebezh skouer 'vit ar Gristenien
 Kozh, yaouank, pe vugale !
 Tro-war-dro 'sav enebourien
 Ha bourevien an ene !

*Quel exemple pour les Chrétiens
 Vieux, jeunes ou enfants !
 Autour s'élèvent des ennemis
 Et bourreaux de l'âme !*

6 - O sant eürus, dous ha nerzhus
 Deskit dimp, ni ho supli,
 Chom stag mat ouzh kalon Jezuz
 ha derc'hel mat d'e veuliñ.

*O saint bienheureux, doux et solide
 Apprenez-nous, nous vous en prions,
 À rester fermement attachés au cœur de Jésus
 Et à continuer de le louer.*

7 - Lakit da gentañ 'n hon spered
 Gwir sklêrijenn ha gwir feiz
 Evit sevel dreist ar stered
 Ha mont tre betek Doue.

*Mettez d'abord en nos esprits
 La vraie lumière et la vraie foi
 Pour nous élever au-dessus des étoiles
 Et parvenir jusqu'à Dieu.*

8 - Lakit don en hon c'halonoù
 Gwir nerzh ha gwir garantez
 Evit harz ouzh hon holl boanioù
 Ha bout eürus-mat goude.

*Mettez profondément en nos cœurs
 Vraie énergie et vrai amour
 Pour résister à tous nos maux
 Et être bienheureux ensuite.*

9 - Lakit c'hoazh e-kreiz hon c'houstiañs
 Lezenn gaer ar burete,
 Neuze ni 'sello gant fiziañs
 War-du an eternite.

*Mettez encore en nos consciences
 La belle loi de la pureté,
 Alors nous verrons avec confiance
 Du côté de l'éternité.*

10 - Ho pennozh war hon ziegezhioù
 D'hon unaniñ deiz-ha-noz
 Ha goude-se mont d'an Neñvoù
 D'ho karout er Baradoz !

*Que votre bénédiction soit sur nos maisons
 Pour nous unir jour et nuit
 Et ensuite aller aux cieux
 Vous louer en Paradis !*